

# DONEDIGUEZ

AN AUTROU AN DUG

HAC

AN ITRON AN BUGUES A NEMOURS

E Montroulez, an 28 Eost 1843.

Var ton : *Chantons l'Hymen, chantons l'Amour.*

\*\*\*

Breizis! bezomp oll en joüsded :  
An Dug a Nemours hac e bried,  
D'hor peurgarga eus a levenez,  
A deu da Vontroulez.

Bugale qer ar Roue  
A bossedimp, dre c'hraç Doue ;  
Hac en güir Breiziadet,  
Hor joa vras vo d'o güelet.

Breizis.

\*\*\*

An eiz-varnugent, e Montroulez  
Ec'h erru ar Prinç hac ar Brinces ;  
Rac-se eta, bezomp preparet  
En deiz-se d'o güelet.

Dre hent Paris e teuint,  
Hac en antre kær e vezint  
Gant ar brassa respet  
En joa an oll recevet.

An eiz.

# RESTITUO

Diredid oll, tud divar ar miz ;  
Diredit buan da Vontroulez ;  
Hastit da zont da guemeret pers  
Ebars en hor Gouël bers,  
Calz plijadur ho pezo, **CA ZOMEL**  
Rac amusamant a vezo ;  
Danç-tro ha jabadao,  
A blich calz d'hor merc'het brao. Diredid.

Mes dreist oll, c'houi, merc'hed yaouanc coant,  
A ra eus hor brô an ornament,  
Deut da gaerat dre ho prezanç ennâ,  
Joaüstet ar Gouël-mâ.  
C'houi ive, potret yaouanc,  
Laouen evel Bretonet franc,  
Ho presanç a dra sur  
A rayo demp plijadur. **Mes!**

An tyes hac ar vatimanchou  
A vo ornet a bavillonou,  
Ha pa vezo an nôs arruet,  
E vo illumfuët.  
Ézet vo da bepini  
Pourmen dre gant e bini,  
Rac an oll ruyou kær  
A vo rentet meurbet sclær. **An tyes!**

En deiz eürus-se, kær Montroulez  
A vo en he brassa levez :  
An oll a vo en rejouissance,  
Vil Mab ar Rode Franc.



Ne vanqit qet, mignonet,  
An deiz-se amañ da rounet;  
Ar Goüel vo d'adous;  
Peb Breiziad a vo joüs. En deiz.

Bezomp sonch mad er gourach ardant  
Eus an Dug a Nemours, Princ vaillant,  
Pa voe kær Constantin gemeret  
Var dud cris 'vel tigret:  
E creiz ar c'harnach goassa,  
Dre humanite ar vassa  
E galon generos  
A gri : « Graç d'ar malçurus. Bezomp!

Enor ha gloar ra vezo rentet  
D'an Dug a Nemours ha d'e Bried!  
An oll a zo joüs en hor Breiz,  
Ouz o c'habut en hor c'heiz.  
Dreist oll, ni, tud Montroulez,  
Qen çürus d'o c'haout en hon touez,  
Criomp a greiz calon,  
Evel Breiziadet çüision : Enor.

Gloar ive d'an Dug yaouanc d'Aumal,  
En deus roet d'an Arabet ar bal,  
Er gombatjou en bro an Alger,  
O frott' Abd-el-Kader.  
Ar Princ zo, dre c'hraç Doue,  
Deut da gaout e dad, ar Roue,  
Leun eus a gonfiac  
Da veza enor ar Franc. Gloar.

E Montroulez, ar Prind a Joinvil,  
Hac e Bried, Princes ar Bresil,  
Ar bemp varnugent a vis Gouere  
Gant joa a errue.  
Na pebes contantamant  
Voa o velet ar c'houlp charmant!  
Redet a rêt gant joa  
Evit dont d'e admira. E Montroulez.

Trincomp, evomp, canomp ha c'hoarzotop,  
En eur guer, en em divertissomp.  
Breizis a dle beza tro vardro  
Güir exempl da bep bro.  
Dre oll o anavezer  
Evit beza potret ceder,  
Leal ha deread,  
Ha dreist oll vit potret vad. Trincomp.

*A. Lédan.*



---

E Montroulez, eus Imprimeri LÉDAN. — Eost 1843.